

178

## Recit truerzus

Var ar maleur horruabl êruet en Passach ar Pors-Neve,  
entre Riec ha Moëlan, arrondissement Gempere,  
canton Pont-Aven, ar 14 eus a vis Gouere 1833.

(153)

Var toy Cantic Christ - Bras ar Vur.

Nesuz, Salver adorabl, prosternet d'an daoulin  
Dirac ho treid beniguet, ô Majeste divin!  
E teuân da impleri diouzoc'h sclêrijen,  
Da zespeigni va recit d'am breudeur christenien.

Er bloa nao mil eiz cant ha c'hoas unay ouzpen,  
E chomen en bourg Moëlan, joais bras ha laouen.  
Mes hirio ar maleur êruet er vro-ze,  
Am laca oll contristet dre eur gêir garante.

Eur spont horruabl a laca va c'halon da stracal,  
Pa deu ar reflexion da ober din sônjal  
Er maleur an euzussa a elfet da glêvet,  
Pehini a zo, sivoas, a nevez êruet.

Ebars canton Pont-Aven, entre Riec ha Moëlan  
Eman passach Pors-Neve, a zo hir ha ledan;  
Eno 'man lec'h ar maleur e zan da zisclêrya:  
Selaouit oll, Bretonet; deut ganen da vouela.

(154)

Ar bevarzoc a Vouere voa Pardon Sant Leyer,  
En pelec'h en em rente ar bobl a bep quartier.  
Euy nombr bras eus a Voëlan, ar joa en o c'halon,  
A zirede d'asista en ofern ar pardon.

Rentet etal ar passach, hac er vag antreet,  
E saille ebarz enni ha potret ha merc'het;  
En peb penn, ebarz er c'hreiz, ha var ar bord ive,  
E voa couchet an dud qez an eil var equile.

Anfin, an oll a grie: aoualc'h omp evellen:

En han' Doue, ne lezit breman den da antren;  
 Ouspen cant e momp amañ, hep gallout remui;  
 Hon tremenit-ta buan vit dont d'hor soulaji.

Gerqent ar vag a bella eus a zouar Moëlan,  
 Mes gant peb precotion ha cabz demeus a boan;  
 Gret voe d'ar vag trei a benn; mes ar mör furorus  
 An antreas gant nery bras var an dud maleurus.

(155) Leuz a spont hac egaret, en em doljont ractal  
 Evel tud dizesperet, a vanden er penn all;  
 Mes gant ar bouez hac ar strong, ... ô Doue! peb horror!...  
 Ar vag a voe confortet ractal en fonç ar mör!....

Doue a vizericord! ô Tad carantezus!  
 Sellit a gompasion ouz an dud maleurus...  
 E maint arze tremen cant en goelet ar mör don:  
 O va Zalver adorabl! pardon! pardon! pardon!....

Deut... diredid, Bretonet, er plaç eus ar maleur;  
 Sellit gant pebes couraj ha gant qer bras ardeur  
 E teu an oll da essât diffraam ouz ar maro  
 An dud maleurus rentet en eur stat qer garo!

Ar merdaidy a zaille ebar en o bagou;  
 Darn all a furche er mör, armet a berchennou;  
 Mes allas! ô va Doue! daoust d'o bolonté vad,  
 Hac o c'houraj dreist-muzur, collet voa ar vagad....

Pebes horrol voa giaelet eno ar mör o verri,  
 Gant ouспен cant maleurus voa eno o veuzi!...  
 An eil croq en equile a ruill en fonç ar mör....  
 O crial: sicour! sicour!... Doue, pebes horror!...

(156) Gwi e vije ar galon, ha cri ma na vouelje,  
 O clévet eur bobl immanç, test eus [ar] maleur-ze,  
 O crial, o teplori, leuz eus a zizesper,  
 En defot n'ellent donet da recours an dud qer.

Mes admiromp, christenien, ar gourach magnifiq  
 Eus ar meliner yaouanc Emmanuel Coantig,

O plonji en fonç ar mör, hep cäs eus e vue,  
Erit dont da savetat an dud paour a veurze!

Qerqent m'ey dije tennet eure a fonç ar mör,  
E saille c'hoas a neve gant ar brassa ardor.  
An oll a voa estonet o velet e gourach;  
Mes, daoust d'e oll volonté, n'ellas mui davantach.

Bet en deveus ar boneur, a drugare Doue,  
Da denna deus fonç ar mör ha rentä d'ar vue  
Tost da uquent maleirrus a voa prest da veurzi;  
Mes an neryz a vanc deän, na elle ober mui.

Selaouit c'hoas, Bretonet henvel tud jenerus,  
Pere en em exposas en eur c'has qerq eürus:  
Ra vezo o hanoyou gravet en hor c'halon,  
Ha Doue da scuill varne e venediction.

Hanvomp Mathurin ar C'hlanç, gant enor, christenien, <sup>(1)</sup> (157)  
Ha Yan Favennec ive, o daou melinerien;  
Për Talyarn, labourer, Colin a Doualam,  
Pini 'ny deus bet ar boneur da savetat e vam!

C'hoas e hanvimp gant respët dre bêvar c'horn ar vro  
An daou batron courajus d'an Autrou Kersalo;  
Martial hac ar Marin, scouer d'an oll gristenien,  
An Autrou Bras, brigadier demeure a Pont-Aven.

Bez' e zeus c'hoas a verit mantion enorapl;  
Mes dont d'o henvel amän certen n'on get capabl;  
Mes, n'eus forç, bezint assur eus hon anaoudequez;  
O c'houstonç o-unan zo o dalvoudequez.

Requetomp digant Doue evito peb boneur,  
Ha meulomp oll o c'hourach, me ho ped, va breudeur.  
Enor ha gloriar da vigen d'an dud jenerus-se,  
Pere a deuas eno d'exposi o bue.

(1). - Lédan a mis un renvoi à cet endroit. La note qui s'y rapporte est, sans doute, celle qui se trouve à la fin de la querey.

Hanojou an dud beuzet eus a barros Moëlan.

(158) Louis Tanguy, da quenta, a drizec vloas oajet,  
Andréo eus a divrach, Michel Richard, c'hoerzec;  
Martial Bourc'his, pèvarzec; Michel Crez, pempzec vloa;  
Peguer, yaouanc, va Doue! va c'halon 'ranc ranna.

Oridor Ladoss, voa oajet a c'hoec'h vloas daou-uguent,  
A lez daou vinoric paour en carg eus o c'herent;  
Mari-Cathel ar Maout, a zaouzec vloas oajet,  
Yan-Mari ar Fleit a voa bars en e zeitecvet.

Mari-Jan ar Fleit, e c'hoar, e doa daou-varnuquent,  
Demeet aboc nax mis, ha douguerez ousten;  
Mari Jacqeta Faoglas, a zeitec vloas oajet,  
Ha Mari-Louis an Torrec, voa en e femprecvet.

Cathel Ladoss voa oajet demeus a ugent vloas;  
Mes erit Cathel Colin a voa plac'h yaouanc c'hoas.  
Cetu aze hanojou an trizec den beuzet  
Demeus a barros Moëlan: an oll zo glac'haret.

Hanojou an dud beuzet demeus a barros Riec.

Louisa Droal, e deoa tri bloas varnuquent tre,  
Ha Mari-Anno ar Saux daou nebeutoc'h a ze.  
Mes neo get hanvet ganemp c'hoas an oll victimou  
Zo en creiz o yaouanqis bet preypier d'an ancou.

Hanojou an dud beuzet eus a barros Clohant]-Carnoct.

(159) Yan Strugeon a zaou vloas varnuquent voa oajet,  
Mari-Jacqeta Jaulin e d'oa he femprecvet,  
Ha Genovefa Jaulin, c'hoar d'homán divea,  
Ne voa qenebeut oajet nemet a c'hoerzec vloa.

Mari-Jan ar Pirion, plac'h yaouanc erit fin  
Ha Joseph-Mari ar Maout, eur paour-qeiz orfelin,  
A zo ar re divea a ellàn dou henvel:  
Cetu ugent maleurus oll er mor o verrel.

Bremàn ta pa int rentet bars en douar zantel,

182

Respetomp a greiz calon digant an Eternel  
 Ma vezjint oll recevet en Pales an Envou,  
 Da vea recomprancet demeus o maleurioù.

Lavaromp oll, Bretonet, eus a greiz hor c'halon,  
 Eun De profundis breman en o intantion.  
 Doue rei deuzo da scuill var o oll familhou  
 Consolation dener ha d'o c'harg a c'hraçou.

A. Lédan.

Autor ar voez-mañ a lacaas rentañ d'ar C'hlanche Deverioù ar C'hristen,  
 en pehini ec'h imprimas ar c'homzoù-mañ varlerc'h:

Al Levr-mañ a apparchant d'an den courajus Mathurin ar C'hlanche,  
 Meliner en Melin an Abat, Parros Moëlan, pehini, en risq da goll e vue, en deus  
 plonjet dre meur a vech en fonz rivier ar Pors-Neve, ar 14 Gouere 1833, deziz Pardon,  
 St.-Leger, en parros Riec, pa berissas eno eur vagad tud, ha pehini dre e vaillantès  
 dreist ordinal, en deuz bet ar bonneur da zicour savetât ouzpen 40 den, pere a  
 voa var ar poent da verza beuzet. Honor Dieu! - Presant a istim hac a ahaoude-  
 quez eus a bers imprimer al Levr-mañ. - 14 Eost 1833.

(Vol. VII, p. 153-159.)  
 Strophes du "Recit" non numérotées.